

# EUN TENZOR

MAR G'OUZOC'H HE ANAOUT

SETU AMAN

AR

GALON-ZE

HE

DEUS

KEMENT

CARET

ANN

DUD!



HAG HI,  
GOUDE BEZA

KEN

NEUBEUT

CARET GANT

AR RE ALL

HE DEUS

GOUSCOUDE

KEMENT

C'HOAS A

GARANTEZ

EVITHO!

Ann hini a sicouro savetei eun ene a savetaio he hini.

Ah ! mar g'alfemp anaout pegement a dâl eun ene so bet renket da eun Doue scuilla he voad evid he brena, petra ne rafemp-ni ket evid savetei ha ne ve ken nemet unan ?

Dihunomp eta ha taulomp a gostez ann neubeut a soursi hon deus eus silvidigez hon ene hag hini hor breudeur.

**O den a renco mervel.**

Da gorf a dle coueza e ludu hag e douar, mes eun ene ac'h eus,

**Ne varvo morse, ha ne sonjes ket !**

Evid ann ene-ze ne varvo biken eo red did prederia ha prederia mad ar goms spontus.

**Eternite !** (da viken).

Petra a liviri-te eun deis ?... petra a vezo evidout ann

**Eternite-ze ?**

Evid ar c'hristen guirionez eo hir meurbet ha mad dreist peb muzul !

Evid ar pec'her n'eus netra falloc'h eget ann

**Eternite-ze !**

Ne achuo biken !!!

Peus nemet niveri kellies a vilionon bloaveziou evel m'az eus a zelienn  
er guez eus ann oll coajou eus ann douar,  
A c'hreunen treaz var ann oll aodchou,  
A damm ieot ar prajou,  
A veradenn dour er mor bras,  
*Conta diou pe deir gueich muioc'h*  
*Conta atau hag ann*

### Eternite

ne vezo ket c'hoas commanset.

### Eternite !!! O Eternite !!!

Eun deiz a zeuio e vezo bet distrujet ar bed ; ar re veo hag ar re varo a  
vezo bet barnet..... ar c'hantvechou a vezo bet berniet var ar c'hantve-  
chou abaoue ma vezo bet achuet da vuhez tremenet ker buhan ha marteze  
ker fall, hag e vezo atau ha da viken.

### ann Eternite !!!

Mar deo evidout ann eternite *eurus*,  
Pebes *eurusdet* ! n'heller ket her c'hompren !  
*Atau* ar joa da veza bet treac'het enebourien da zilvidigez,  
*Atau* ar peoc'h hag al laouenedigez ;  
*Atau* beva e compagnunez ar saent hag ann Eles ;  
*Biken* inoui, *biken* cahout aoun !

### Atau Doue

Da velet, da garet, da venniga ha da gahout evel da vrassa mad...  
Mæs mar deo evidout ann Eternite ebars en Ifern, chomm da viken en Ifern :

### Peger spontus e vezo da voal-eur !

*Atau* rebeichou da c'houstians oc'h da zibri !  
*Atau* ann tân oc'h da zevi !  
*Atau* ann droug-sperejou oc'h da dourmanti !  
*Atau* mallos ann Autrou Doue o poueza varnoud !  
*Biken* eur mareadic ehan !  
*Biken* eur veraden dour d'oc'h da refresca !  
*Biken* eur gomz mignon d'eoc'h da gonsoli !  
*Biken ! Biken ! na biken* eur sonjeson a fisians !

### O den,

Bez'ez eus eun *eternite* ha ne sonjes ket !!! Hag emañ gouscoude var  
ribl ann *eternite* ! Da benn eun nebeut devechou ne vezo netra mui evi-  
dout nemet ann *eternite*...

### Netra ne chomo ganes

euz ann oll ebatou, eus ann oll afferiou, eus ann douar, eus da vuhez me-  
mes a gares kement, ne vezo mui

### nemet ann Eternite !

Neuze e vezo tremenet *eurusdet* ar pec'her, ne chomo mui ganthan nemet  
ar boan. *Diæsamanchou* ann den vertuzus a vezo tremenet ive, mæs he  
*gurunen* a bado da viken.

### Kense :

Pe *joausdet* ar bed-man gant poaniou divuzul da viken EN IFERN ;  
Pe *poaniou* ar bed-man gant louenedigez eus ar BARADOZ da viken.

## Teus nemet choasout...

Græt eo va choas ganin : guelloc'h eo ganin euruset ar Barados da viken !...

Doe n'hoc'h eus biscoas commanset ha ne achufoc'h biken, o va barner dreist ann oll barnerien, en em gavout a ran spontet bras pa sonjan en *Eternite* hag en em daulan d'ann daoulin dirazhoc'h. Ne alfen mui cahout tam ebet a fizians ma ne vouifen ket peger bras eo ho madelez.

Truez. o va Doue, truez abalamour d'am oll bec'hejou ha da veza daleet kement abars en em gonvertissa. Eur glac'har bras am eus anezho, hag am eus breman eur c'heus bras da veza great goap ous eun Doue ker mad ha ken din da veza caret. Ann druez-ze, fisians am eus he reseo dre veritout Jezuz-Christ ho mab maro var ar groaz evid va silvidigez. Heb dale pelloc'h e rin eur goession guirion eus va oll fec'hejou, hag e rin va fossubl evid beva eus eur vuhez e guirionez vertuzus ha santel, evid ma hellin ho caret hag ho penniga en ETERNITE eurus. Evelse bezet great.

O Jezus, c'hui ha ne fell ket d'eoc'h mougat tre ar c'houlouen a ve c'hoas o tivogedi, enaout c'hoas en hon eneou guir c'houlouen ar Feiz. Roit da entent d'ann dud reuzedic-ze ha dianket, pebes goall-eur spontus a so ous ho gortos mar kendalc'hont o tisprijout hag o tianavesout madoberou divuzul eun Doue en deus ho c'hrouet evid rei d'ezho eul loden eus he eurusdet he unan.

Hogen, o Jezus, ar pez a laca muia nec'het ho calon ken hegarad, eo pa velit bemdes tud o coueza a villierou, en islonc spontus n'ho poa ket crouet evitho, mes evid ann droug-sperejou nemet ken. Ann dud reuzeudic-ze n'ho devezo biken tam carantes evidhoc'h, hag en ho zourmanchou criz, en ho disesper heuzus, ne vouezint morse nemet ho milliga. Dale'h-mad e rebeichfint ouzhoc'h da veza ho c'hrouet, egis ne ve ket int ho deffe en em zaonet ho unan. Oh ! ma anavesfent tenediges divusul ho calon he deus ho c'haret beteg assanti mervel evitho var ar groas, ne alsent ket miret da garet eun Doue en deus en despert d'ho fec'hejou, ha d'ho dianoudegez, kendalc'het d'ezho ar vuez, m'ho dije bet amzer avoalc'h evid distrei davan. Oh ! mar g'alfemp anaout en dail-ze talvoudegez ar vuhez ! Ne fell ket dezho comprenn penaus anezho ho unan ne d'int netra, ha ne hellont netra, na soken astenn ho buez d'eus eun heur amzer nemet ken. Sonjal a ra dezho ne d'hoc'h sort ebet mestr dezho ? disnac'h a reont ho calloud ha disprijout ho madeles. Siouas ! pebes rebeichou c'houero a rai dezho ho c'houstonians, pebes disesper a ranno dezho ho c'halon hed ann Eternite ; pa teuo sonj dezho d'eus madelez Jezus en ho c'henver ha deus ann disprij ho deus bet evithi, ha pa velint pebes mad, pebez tenzor ho devezo collet evit eur plijadur berr-badus ha dister.

O Jezus petra ho pije allet-hu ober ken evid miret ne guesjemp en Ifern ! Fallet so bet ganeoc'h, evid hor zilvidigez, gouzany oll diesamanchou ar baourentes, ar poaniou ar mezussa, ann tourmanchou ar c'hriha hag ar maro var eur gibet iffam. Ar bec'herien reuzeudic ne ententont ket hoc'h eus gouzavet kement se oll dre garantez evidomp.

Roet peus d'eomp ar sacramanchou, ha dreist oll ar sacrificis santel eus ann offern ma hellimp cahout pers er meritou eus ho passion. Er sacramant santel eus ann aufer, ho carantez a ro deomp ho corf, ho coad, hoc'h ene hag ho tivinite, evid maga hon ene ha kenderc'hel ennomp ar vuhez eus ar c'hrass hon deus resevet d'ann deis eus hor Badiziant hag hoc'h eus kellies a veich rentet deomp dre ann absolven pa zeuemp glac'haret meurbet da veza hoc'h offanset ha da veza collet ann donezon ker presius eus ar c'hrass pa zeuemp eta d'ober eur goession guirion. C'hui eo hoc'h eus hel lavaret deomp, Salver karantezus, red eo deomp dibri ho corf hag eva ho

coad evid cahont ar vuez ennomp da vikén. Ho carantez hor galv heb ehan, pebes goal-eur evidomp ma rafemp ar scouarn vouza ! Oh ! ni ho ped, teuzet ar c'halonou caledet, ha ne ve nemet en heur diveza, evel m'hoc'h eus tenereat hini al laer dehou ha re ho pourrevien ho unan.

O calon Jezus carget a c'huerder, ha rannet gant glac'har evid savetei ar bec'herien reuzeudic ne ehanont ket ous hoc'h offansi, ho pe truez ouzomp Guerc'hes santel, Mari mamm da Zoue ha deomp oll, o Mari consevet dinam, pedet evidomp, ho pe truez ouzomp ! Ah ! pec'herien, ma clevit hirio mouez ann autrou Doue o prezec ouzhoc'h, me ho ped, arabad eo caledi ho calonou ! Piou voar ? marteze eo ar galv diveza a glevit digant eun Doue madelezus, hiviziken ne glevoc'h mui nemet motes eun Doue just :

O calon Jezus o vont da vervel, ho pe truez eus ar re so en ho fassion ! (100 devez induljansou.)

Va Jezus trugarez ! (100 devez induljansou).

Calon dous a Jezus, bezit va c'harantez ! (500 devez induljansou).

Calon dous a Vari, bezit va silvidigez ! (500 devez induljansou).

Daoulinet dirazhoc'h o va Jezus, e c'houlennan dre ann oll c'houerder a veuz ho calon o velet pegen neubeut a dalves da silvidigez ann dud ar pez oll hoc'h eus renket da c'houzanv evitho, ra vezo diouallet d'eus tân ann Ifern kement hini a lavaro ar beden-man, pe a skigno anezhi etoues ann dud. Evelse bezet great.

Guelet ha bet ann aotre digant ann Aotrou'n Arc'hescop Bourges :

*27 a viz meurs 1879.*

**SAUTEREAU**, vikel vras.

Guelet ha bet ann aotre :

*Angers, ann 5 a viz mae 1879.*

**J.-A. PESSARD**, vikel vras.

